

GUERZ NEVEZ.*Var un Ton nevez.*

1. Speret-Santel, me o supli,
Roet ho crasso ha lumier din
Ma hallin recita eur malheur
A zo c'hoarvezet en quartier Treguer.

2. Ebars en canton Lezardreo,
Pleumeur-Gautier ezeo en dreo,
En devez quenta a vis mai
A safiont o daou eus ar beurre.

3. Evit monet da un euret da Tredarzec
Da dy un dea, Jacques ar Pellec,
Allas ! ac o return a hanne
A zo arriet malheur etreze.

4. Epad an deis bars en euret
An dioual a voa en e speret,
O laret dezan laza he briet,
Allas ! ha dar fin en devez graët.

5. Pa voaint assambles o leina
Erruet tout ar gompangnunes-man,
Un den yaouanc a zo antreet
Ha hen devoa he darempredet.

6. Ho ya bars en e yaouanquis,
Gant furnes ha pep honnestis.
Assa, Catherin, emezan,
Pa zomp en eur gavet ama.

7. Ma rafac'h un dans em requet,
Rac pel a zo hini non deus grët.
He friet a voa er hoste-all,
Ho clefet a ra sello fall.

8. Pa voa ho leinno ganto debret
Ar grasso a zo bet commencet ;
Pa né finisset ar grasso
Ezéo bet commencet an danso.

9. Donet a ra an den yaouanq-man,
Hac é doc en hé zorn gantan,
Evit é houlen digant é friet
Da ober un dans en hé requet

10. Ho ya, danset ar pez a gueret,
Evidon-mé na sauzin quet.
Me a ya breman dar guin-ardant
Da efa quen a vezin contant.

11. Ma friet a ziscoët din erfad
Na deus quet bet dezir he daoulagat ;
Mes pa zeo an danso finisset
E zeo retornet da gavet he friet.

12. Va friet paour, mar em heret,
Dar guer fennos na neffom quet,
Rac al loar na vo quet sclër,
Ha pel a hent on deus da ober.

13. Bed drouc ha mad gant a neb a gou zo,
Dar guer fennos ny a yelo.
Pa voaint eus an dol ho efa
Pep a vanac'h, quen evit partia.

14. Hac en o tistrei deus he briet,
Dezi neuze en deus lavaret :
Da yebet a da crasso mad
Evit da diveza guerennat.

15. Pa voaint arri en bourg Tredarzec
En ty e faëron eo bet entreet :
En hano Doue, ma faëron, ma loget,
Rac ma friet a zo guel goloret.

16. Monet dar guer na gredan quet
Gant aon da vezan lazet.
Etu dar gant ho priet
Evit-dome n'o login quet.

17. Ho priët a zo un den dangerus ;
Ma ho lochen me a ve malevrus ;
Quemen tra a meus er bed-man
Ne quet evit resista outan.

18. Et eur pennat var an hent bras,
E tistrojont en un hent gras ;
Bars en hent glas pa zint avancet
Eus he briet et zeo distroet.

19. Lavar da in manus pa gari,
E zout er plas ma varvi.
Ha possub e ve. o va Doue,
E ve c'hui, va friet, em lasfe.

20. Seis mis so omp eureujet,
E zomp ho cregui en eisvet ;
A bredic e zeo hoas couscoude
Ha hourdrouzit cavet ma bue.

21. En hano Doue n'em lazet quet
Quen a vezo hon buguel badezet,
Quen a vezo hon buguel badezet,
Neuse me a varvo pa gueret.

22. Rei a ra dezi seis tol contel,
Ar malevrus, an den cruel ;
Pa ya evit rel an eisvet
E gontel dan douar a zo coezet.

25. He displanta ne alle quet
Car Jesus na bermette quet
Sevel a ra var he daoulin
Da houlen pardon ous he mest divin.

21. Ho ma doue, ma fardonet
Ha pardonet ive ma friet;
Santes Catherin, va maërones,
Pedit evit ho fillores.

25. Ha ma lequet dindan ho protection
Ha goulennet evidon pardon.
Bars en eur men bras en a zo eroguet
Hâ var he fen en deus-an tolet.

26. Ha prest he bue a zo finisset
Entre daouarn an den coleret.
Dezi a dare en a zo et;
He hoste dezi en deus toulet.

27. Eur hrouadur an deus cavet,
Ar malevrus, an den possedet,
Eur hrouadur deus ar haëran
Ho houlen badiziant digantan.

28. Cri a vige ar galon ma na voelge
Bars en hent glas neb a vige
Ho tonet da glevet an innoçant
O houlen olêo da badiziant.

29. Tao, ma buguel, na teus ezom da voela
Evit ar belder a teus da veva:
Da vam eo ar guenta a meus lazet
Ia te a vezo an daouvet.

50. Var an douar en deus-an tolet,
Dindan e dreit en deus-an friquet,
Dezi adare e zeo et
Da derri dezi e biziet.

51. Hac he diou vron en deus trohet
Neuse pa en deus-i massaret
Gant e mantel en deus-i coachet
Quazi vel pa vige cousquet.

52. Ha dar guer neuze en a zo et
Bars er guer pa zeo erruet
E voa tud e dy et da gousquet:
Goulen digor en deus renquet.

53. He vates a zao da guenta
Da zigueri an nor dezan.
Quenta mad hê deus goulennet:
Ma mestres pelec'h e chomet?

54. Ho mestres a zo clan en eur gavet,
A meus-i paquet da gousquet.
Voarhoas ar beurra, pa vo de,
A heet da viti gant un hencanne.

55. Hastit lumi ar goulou
Ma voelfomp sicer monet d'on gueleou.
Ar goulou pa eo bet allumet
Ar vates a zo bet fatiguet.

36. Ha pa eo bet difatiguet
Digant e mest he deus goulennet:
Hui a heus un nevesenti benac,
Beuzet e zeo ho tillad gant ar goat.

37. Ya, emezan, nevesenti a meus bet,
Car va fri an deus divoadet.
Tapit prompt dime va alc'hoë
Ma m'o ma dillat da bemde.

38. Ma hin da gousquet dar grignel,
A lavaret na vin quet er guer.
Ar plac'h evel ma deus clevet
A ya de sevel an domestiquet.

39. Ne chomje quet ar c'hrim cuzet;
Ma vige an den-man comeret,
Ya, a conduet dar prison
P'an devoa sujet ar réson.

40. Eur vrec deus an amezeien
Hac a voa o chom en he hichen
Er memeus de e voaint eureujet,
Hac o diou e voaint douguereset.

41. An de varlec'h deus ar beurra
He renquet tremen dre ar plas-se.
En e hichen pa he arriet
Deus e mantel he deus hi hanaveët.

42. Catherin, emezi, sav alesse;
Te a zo chomet vit an noz ase,
Hac entre ma vi en bue
Biquen pret direproch na pe.

43. He mantel divarny pa deus lamet
He halon a zo bet fatiguet,
Ha var teir heur goude
Et finissas ive e bue.

44. Var ben an eis te dar goude,
Justis enno en em rente
Va vije an daou corf paour-ma disinteret
Vit gout petra voa ar sujet.

45. Hervoan Nicolas a lavare
Var ar chafot na pa bigne:
Guersset yaouanc, tostait aman, me ho ped,
Ha hui ive ezac'h demezet.

46. Na ne quet en defot a zanve
A ra dime coll va bue;
Me a meus pemp cant scoët levé,
A ma friet en devoa outre.

47. Da naontec vloa he meus y lazet
Ha me a varv var va uguenvet.
Christenien vad, me ho supli,
Lavarit evite un De profundis.

FIN.